

KEVREDIGEZ VROADEL A-ENEP AN ALKOL

(Kevrenn Roùzon)

TORFEDOU AN ALKOL

I. — Eun ampoezon eo an alkol

Laza a ra an traoù beo. Implijet e vez da virout ar frouez abalamour ma laz ar mikrobed a lakafe anezo da vreina hag ar c'hebell-touseg a lakafe anezo da louedi.

Laza a ra ivez ar frouez, avat, ha ma vije lakaet en douar ur gere-zenn mirét er gwin-ardant ne deufe kerezenn ebet diwarni.

Ober a ra kemend-all war hor c'horf. Bez' e rankfe an odivi beza anvet « dour-a-varo ».

An alkol a vez kavet er sistr, er gwin hag er bier a zo eun ampoezon ivez. Tri litrad gwin pe eiz litrad sistr a zo enno, well-waz,, kement a alkol hag en *eun litrad gwin-ardant*, evel odivi gwenn an davarnourien.

Al likoriou, dreist-holl an aperitivou, a vez evet pa vezer war yun, a zo nozusoc'h c'hoaz.

2. — An alkol ne ro ket nerz, ar c'hontrol eo a ra

Kalz tud a gav dezo e ro nerz an alkol. N' eo ket gwir. Ar c'hontrol eo a ra. Ha setu penaos.

Lakaat a ra ar santerez ennomp da gousket. E-pad eur pennadig, eta, an hini a zo o paouez eva ne sant ket mui e skuizder. Bez' e c'hell an den derc'hel e-giz se gant e labour hep gouzañv. Kreski e skuizder, avat, ne ra ken. Divi e teu da veza ha pa deu en-dro ar santerez ennañ n' eo ket mui evit labourat.

Setu perak ne vez evet banne gwin-ardant ebet gant ar sportourien vras.

Er c'honkouriou olimpik, paotred ar Finland vihan na event ket a win-ardant a veze dreist d'ar C'hallaoued, anez tud hag a gar o banneou.

An alkol a zo unan eus pennabegoù hon drouziwez e 1940.

3. — Al lonker n' eo ket mui mestr anezan e-unan

Ankounac'haat a ra al lonker e brederiou hag e zleadou hag e c'hell beza gwelet o tiroll da c'hoarzin pe, er c'hontrol, oc'h en em rei d'ar gounnar. Diskulia a ra segredou e familh hag alies e laka e wreg hag e vugale en dienez vrasa. Gwasoc'h e c'hoarvez c'hoaz en em ro ar vamm d' ar gwin-ardant.

Arabat disoñjal ar c'hrennlavar :

« *An tiegez war an tu gin
A vez lakaet prest gant ar gwin.* »

pe c'hoaz :

« *Gwaz mezhier ha gwreg everez .
A skarz buan eun tiegez.* »

An alkohol a zo kaoz da galz a wallzarvoudou. Eun den o labourat war an hentou-houarn pe eur blenier kirri-tan oc'h en em rei d' ar boeson a zo eur riskl bras evit an holl.

Eur micherour lonker a labour nebeutoc'h eget eur micherour all hag e labour n' eo ket kerkoulz.

4. — An alkohol a ziskar yec'hed al lonker

Pa ever alkohol alies e teuer buan da gaout ezomm anezañ hag, abred pe ziwezat, ne c'heller ket mui tremen heptañ. Neuze e tiskar tamm-ha-tamm an ampoezon-se yec'hed al lonker hep gouzout dezañ zoken. Pa verk an droug graet d' e gorf ez eo re ziwezat peurliesa. Kabac'h e teu al lonkerien da veza a-raok an oad. Kalz anezo ne dapont ket oad ar retred.

An everien ne c'hellont ket herzel ouz ar c'hleñved evel an dud dilontek. Ul lonker taget gant an derzienn-domm pe an danijenn-skevent a varv an darn vuia eus an amzer. Ur medisin bras en deus lavaret : « An droug-skevent a vez tapet war daol an davarnourien. »

Ar Frañs a zo ar vro ma ever ar vuia a alkohol. Rak-se e sko didruez an Ankou e-touez ar Frañsizen. Breiz a zo unan eus ar rannvroioù ma ever ar vuia a alkohol er Frañs. Setu perak e kaver enni kement a dud taget gant an droug-skevent. Niver an dud o vervel gant ar c'hleñved-se e Breiz a zo diou wech brasoc'h eget er Frañs, pep hini d' he c'hont evel just.

5. — Torfetourien pe folled, setu petra a ra an alkohol eus an dud

An alkohol a zo pourvezer bras an tiez savet evit ar re foll hag ar prizonioù. En holl vroioù eo bet gwelet niver ar folled, ar vuntrerien hag an dud oc'h en em laza o vont war-gresk pep gwech m' eo bet evet muioc'h -mui a alkohol enno gant an dud, hag o vont war vihanaat pa vez evet nebeutoc'h-nebeuta anezañ.

Abaoe hanter-kant vloaz eo bet ranket brasaat dalc'hmat Folldi Sant-Meven (St-Meen) e Roazon. Er c'hontrol, abaoe ma vez kavet

nebeutoc'h a win-ardent da brena ez eo aet war vihanaat niver an dud o vont e-barz an ti-se. Diou wech kemend all a dud a yae e-barz e 1940 kement ha ken bihan ma n' eus ket a-walc'h a folled da lakaat en eun ti bras nevez-flamm a c'hell servijout hizio da lakaat tud all (Ebrel 1942).

Kemend-all a c'hoarvez e folldiou pe ospitaliou all.

6. — Banne alkohol ebet d' ar vugale !

Betek an oad a zaouzek vloaz ne ranker rei d' ar vugale banne evaj ebet a zo alkohol ennañ. Ar grouadurien a oer gwin pe sistr dezo a vez strafuilhet hag a gousk fall. Kemend all a c'hoarvez pa ev ar vagerez evajou alkolek betek re.

Taoliou-esa resis o deus lakaet anat ne vez ket ker lemm spered ar vugale pa evont gwin-ardant, zoken pa ne evont ket kalz anezañ.

7. — An alkohol evet gant ar gerent a zo nozus d' o bugale

Kalz a vugale da everien gwin-ardant a varv ez-vihanik. Ar re a vev a zo alies pe diskiant, pe diwezat pe dort pe a gouez e droug-sant. O veza m'int niverus e Breiz eo bet ranket sevel tiez ispisial evito. Kalz anezo a vo mezvierien hag a-wechou muntrerien.

An alkohol evet gant an tad da zeiz ar grouidigez a ra ar vugale diot. An alkohol evet gant ar vamm, p' emañ o tougen, a ra ar vugale gwan a gorf hag a spered.

8. — Daoust hag e c'hell an alkohol talvezout d' eun dra bennak?

A-dra sur e c'hell met pa vez kemeret evel eul louzou nemetken.

Da skouer : an alkohol, kontamm-digizidikaat anezañ, a c'hell bihanaat ar skuizder; ur c'herzer na c'hell ket mui kenderc'hel da vale a c'hello eva ur banneig gwin-ardant evit mont betek penn e hent. Bihanaat a ra ivez ar boan; un den gwall-c'houliet a vo lienet aesoc'h a se ma roer ur banne gwin-ardant da eva dezañ.

9. — Daoust hag eo mat an alkohol da vaga an dud ?

Ya, met eur boued eus ar falla eo anezañ, da genta dre ma 'z eo an hini kera eus an holl bouedou ha, dreist-holl, abalamour ma 'z eo kontammus hag e tidres hor c'horf.

Ar gouizieg bras Kladoa Bernard a lavare : « Bez' ez eo an alkohol skouer kontammou hon nervennoù. »

Lakaet o deus anat ar ouizieien a vremañ :

a — ne c'hell ket an alkohol rei tommder d' hor c'horf daoust d'ar pezh a gred an dud peurliesha. Kas a ra gwad tost d' hor c'hroc'hen ha

neuze e santer e vezer tommoc'h. Ar gwad, avat, a-stok gant an aer yen, a zeu da vezañ yen hag e-pad ar goañv eul lonker kouezet a zo e riskl bras da goll e vuhez. Ne c'hell beza saveteet nemet dre domma anezañ.

b — ne ro ket nerz an alkol. Rak-se, pa lavar an dud e c'hell ar re a labour gant o daouarn eva hep aon kalz a win-ardant, war zigarez e loskfe al labour-korf kalz a alkol, e reont *eur pikol fazi*.

E-pad eun enklask graet e-touez micherourien o labourat kalet (1942 ha 1943) e larvajont holl ne oa ket bet bihanaet nerz o c'horf abaoe ma ne vez ket mui kavet kement a evajou alkolek da brena. Pep hini a rank merka kement-se warnañ e-unan.

10. — Evit klozan

a — An alkol a zegas gantañ, en tiegez hag er vro, an *dizurz*, ar *rivin*, ar *boan* hag ar *maro*.

Bez' e ra eus ar gwaz eur *reuzendig*, eus gwreg al lonker eur *verzerez* hag eus ar vugale *krouadurien diskiant ha tort*.

b — An den en deus kemeret ar pleg-fall da lonka ne c'hell terri anezañ nemet dre nerz e youl met peurliesha ne c'hell ket hen ober. Setu perak eo ret diwall ar vugale ouz ar pleg-fall-se dre zeski dezo er skol an droug a vez graet gant ar gwin-ardant.

Setu perak eo bet roet urz gant Ministr ar Deskadurez da rei adarre ar gelennadurez a-enep an alkol bet dilezet etre an daou vrezel ha perak e vo goulennataet warni ar vugale pa dremenint o santifikad.

Ar rener : Doktor MILLARDET,

kelenner a enor e Skol-Vedisinerez Roazon.

ARABAT DEOC'H TEUREL AR SKRID-MAN D' AR BLOTOU.

HEN ROIT DA LENN D' HO MIGNONED KENTOC'H !

